

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

78. JACOBIN REDON -- MANAC'H RU --

( follenn 239 )

Mam m'be me eun tam da zribi hag eur bane da éva  
 Me kontfe dec'h darn deus an torfetou a meus goëlet en  
 noz man.


eur plac'hik iaouank a Ridon a voa meurbet devodez  
 a ie bemdez d'an offeren dar gouent da St Fransez  
 da regeti drouk d'he leztad a re de mam goal vuez.

A donnet an daou Jakopin a donnet de saludi  
 deud ganeom-n'hi Franssezaïk, deud tu ganeomp n'hi don  
 ti.  
 deud ganeom-n'hi Fransezaï, deud ganem-n'hi don c'hamb  
 ni a diskuezo dech tollenou a misteriou excellent.

Francezaïk a lavare na ken truezus a tra :  
 lezed va buhez gan em he a me kuitaio ar bro man.

Francezaïk a lavare na ken truezusa tra  
 Roît badichan d'an bugel a zo em c'hreïs da vianan.

Salokras, Francezaïk, salokras ne reïomp ket  
 c'houi eo dem-n'hi an navet da veza en noz man kemeret  
 hag eur bugel a pep hini  
 ag el leel, Fransezaïk, neket triwac'h a reonti.



Moris Follezour, 22 janvier 1851

